


**KANTIK SANT ODOEN**

Patron Parrez Rosnoen



Dindan ar roue Dagobert  
Bro-Frans a oa eurus ha kaer,  
Ministred leal ouz he ren,  
Sant Alar ha Sant Odoen.

DISKAN :

*Sant Odoen, patron karet,  
Gant hon tadou bet dibabet,  
Diwallit parrez Rosnoen,  
Mirit enni ar feiz kristen.*

Eün e galon, lemm e spered,  
Odoen, aketus abred  
Da heulia lezenn hor Zalver,  
'Blije d'ar roue Dagobert,

Hanvet da vinistr ar roue,  
Dindan dilhad kaer e touge  
Eur c'houriz reün dre binijenn,  
Kalz amzer 'roe d'ar bedenn.

Evit senti ouz komz Doue  
« 'N em garit an eil egile »,  
E zorn a zigore d'ar paour,  
Mont 'rae da welet ar c'hlanvour.

Brud vat eur vuhez ken santel  
O vont da Rom ne voe ket pell :  
D'eskob Rouen pa voe hanvet,  
Ne jomas den ebet souezet.

Gant kalz dousder 'n eskob neve  
D'an holl o dever 'ziplege ;  
Komzou nerzus e brezegenn  
A c'hounenze kalon pep den.

Eur groaz vuzudus war e hent :  
An eskob a zonjas kerkent :  
« Doue 'zibab an douar-man »,  
Hag e savas eur gouent warnan.

Da zul eun den a labourer  
O laerez devez e Zoue ;  
Droug bras gantan a c'hoarvezas,  
Sant Odoen e bareas.

« Den paour, evit en em zével,  
Dalc'hit sonj mat eus va c'hentel :  
Goude labourat c'houec'h devez,  
Roit da Zoue pep sulvez. »

Evit lakat ar peoc'h da ren,  
Eur mestr oc'h-c'houi bet, Odoen ;  
Kasit a-douez ar gristenien  
Brezel ha Kernez ha bosenn.

D'ho pugale roit skoazell,  
D'ar gêr henchit ar re 'zo pell ;  
Chachit d'ar vad tud Rosnoen,  
Ma zaint d'an nenv en ho kichen.

Hon diwallit 'vel hon tud koz,  
Ha ni a gano deiz ha noz :  
Nag en nenv na war an douar,  
Sant Odoen 'n deus ket e bar.

J. T.

Aotre da voula  
Kemper : 16 Eost 1943.

P. JONCOUR,  
tiket uraz.